

# HENTAD C'HOARI E BOURC'H MOLAN



Levrig aozet gant ar gevredigezh « Pregomp Asambles » :

**Kevredigezh hervez lezenn 1901, bet krouet e 2008, gant he fal diorren ar brezhoneg ha sevenadur ar vro.**

Kentelioù brezhoneg liesseurt 'vez aozet diouzh live ar stajidi. Aozet e vez ivez darvoudoù a bep seurt e-kerzh ar bloavezh : kaozeadennoù, baleadennoù, diskouezadegoù, stajigoù, abadennoù, prezennoù... da bleustriñ asambles.

Lec'hiet e Molan, ar gevredigezh a zegemer tout an dud dedennet gant sevenadur ar vro.

[degemer@pregomp-molan.bzh](mailto:degemer@pregomp-molan.bzh)

[www.pregomp-molan.bzh](http://www.pregomp-molan.bzh)




Adalek 8 vloaz

# DONEMAT E MOLAN !

Hed-ha-hed pajennoù al levrig-mañ e kinnigomp deoc'h dizoleiñ Molan.

Pep goulenn a glot gant ul lec'h dibar e kêr. Ur wech en em gavet war al lec'h e vo ret deoc'h respont d'ar goulenn. Gant ar respont-se e c'halloc'h kaout ul lizherenn da skrivañ e dibenn al levrig. Evel-se e kavoc'h ar frazenn kuzhet : ger-stur Molan !



Kartenn : mappy

Emichañs e vo plijadur ganeoc'h o vale dre ar gumun,

Skipailh kevredigezh Pregomp Asambles

## Poent loc'hañ : ar blasenn Lindenfelds ①

Anvet eo bet al lec'h « Plasenn Lindenfels » e 1988. A-raok e oa « Plasenn Sant Filibert » evit tud Molan.

Lindenfels eo :

- anv maer kentañ ar gumun ☐ M
- anv ar gumun er Grennamzer ☐ A
- anv ur gêr e Bro-Alamagn ☐ D



## Skoed-ardamez Molan

- An tri fesk ouzh ur foñs alaouret a zegas soñj eus an 3 forzh-mor e Molan hag eus an traezh.
- Ar c'hentroù gwenn ouzh ur foñs ruz a zegas soñj eus ar familh Kermoger.
- Degas a ra soñj an erminigoù eus banniel an duked a Vreizh rak perc'henn oant war tachennoù e Molan
- Galloud an Iliz zo diskouezet gant ar gammell, bazh eskob Kerne


Pehini eo skoed-ardamez Molan, asantet gant Kuzul ar Gumun d'an 19 a viz Mezheven 1982.



☐ P



☐ E



☐ T

## Chapel Sant Filiberzh ha Sant Rok

Pehini eo kloc'hdi ar chapel :



☐ S



☐ U



☐ R

## Feunteun Sant Rok

Sant Rok eo sant gwarezour an dud klañv gant ar vosenn. Pevare oa bet savet ar feunteun anvet diwarnañ (memes mare e-giz ar chapel hag ar c'halvar) ?



XVIvet kantved

☐ S

XVIIvet kantved

☐ O

XVIIIvet kantved

☐ T

## Plantenn vurzhdus el leton

Anvet "mildelienn", ar blantenn-se zo implijet da bareañ gloazioù bihan.

Petra eo hec'h anv all ?

- broustoù ☐ M

- louzaouenn ar c'halvez ☐ A

- linad bras ☐ R



## Plantennoù war ar mogerioù

Implijet e vezent gwechall, gant ar mammoù-kozh, da naetaat ar pilligoù. O stumm zo un tammig evel krampouezh.

Peseurt eo "krampouezh mamm-gozh" ?



☐ E



☐ O



☐ N

## Plasenn an iliz **2**

### Iliz Sant Melen

Peseurt stil he deus iliz bourc'h Molan, savet e 1879 ?




Arz gotek

☐ **D**



Arz roman

☐ **L**



Arz byzantat

☐ **E**

### Toennoù ar vourc'h

Gwechall, toennoù an tiez a veze savet alies gant plouz. E Molan, e-kreiz an XIXvet kantved, un tan-gwall bras 'n eus distrujet ul lodenn vras eus tiez ar vourc'h. Goude an darvoud-se, ur skrid-embann oa bet kemeret gant kumun Molan e 1845, evit rediañ toennoù mein-glas er vourc'h.

Gant peseurt dafar e vez savet toennoù tiez bourc'h Molan bremañ ?

- plouz ☐ **D**

- mein-glas ☐ **O**

- teol ☐ **N**



### Orin an anv "Molan"

Ne ouiomp ket re vat eus pelec'h e teu an anv "Molan" met sur omp ne zeu ket :

- eus ur manac'h, Moë e anv ☐ **D**

- eus ur manac'h oa blot ha gorrek, « mou et lent »

☐ **U**

- eus ul lann mouest pe mouestlann e brezhoneg kozh

☐ **G**



(skeudenn eus wiktionary)

### Porzhioù Molan

Anv porzhioù Molan : porzh Belon, porzh Brigneo, porzh Merien.

E porzh Belon e vez gwelet bigi pesketa o tont bemdez da werzhañ pesked ha kresteneged.

Peseurt pesked ne c'heller ket pakañ tro-dro Molan ?

- sardin ☐ **G**

- pesked-furlukin ☐ **A**

- merluzed ☐ **V**

- levneged ☐ **R**



## Istr Molan

Istr gouez e vez kavet e Molan war kerreg ribloù stêrioù Belon ha Merien. Peotramant e c'heller prenañ istr war ribl kleiz ar stêr Merien.

Pehini eo an istrenn blat ?



☐ R



☐ I



☐ V

## Koef Molan

Pehini eo koef Molan ?



☐ H



☐ I



☐ R

(eus ur gartenn-post 1955)

## Straed Cecile Ravallec 3

Peseurt arzourez oa Cecile Ravallec, ganet e Molan e 1907 ?



kizellerez

☐ S



livourez

☐ A



skrivagnerez

☐ V

## Ruig ar c'harrou

Gwechall, a-raok ar c'harr-tan hag ar velo, e veze an dud o vont war droad pe war varc'h. Tud ha dafar e veze treuzdouget gant kirri. Ar c'hirri oa savet ha kempennet gant ar c'harrou. Kavet e vez c'hoazh un nebeud karrourien oc'h ober war-dro kirri-kezeg.



Petra eo ur c'harrou ?

- ur blenier-karr

☐ A

- ur roman

☐ O

- ur mekanisian kirri

☐ D

## Ar c'hastell dour



Petra 'weler a-istribilh ouzh kastell dour Molan ?

- ur chafod houarn evit adlivañ anezhañ ☐ **T**
- un oberenn arz modern ☐ **R**
- ardivinkoù skignañ ar gwagennoù pellgomz ☐ **E**

## Kalvar ar vered

Teir rann a ya d'ober ar c'halvar : ur sichenn, ur fust hag ur groaz dibenn.

Pehini eo fust kalvar Bered Molan :




fust bosenn (gant  
boulennou bihan, arouez  
gwerbloù ar vosenn)

☐ **E**



fust « brankoù » (gant  
tammoù brank torret,  
arouez « Gwezenn ar  
Vuhez »)

☐ **U**



fust lenkr (nitra war  
ar fust)

☐ **R**

## Skolaj Molan 4

Peseurt anv en deus skolaj Molan ?

- Park ar skwat / Yves Sotty ☐ **K**
- Park an troad / Yves Totty ☐ **A**
- Park ar c'hoad / Yves Cotty ☐ **S**



## An ti-gar

Gwechall oa bet savet un hent-houarn etre Kemperle ha Konk Kerne. Digoret e oa bet e 1913 ha serret e 1936.

E Molan e oa un ti-gar, savet e straed Park ar c'hoad.

Pehini eo an ti-gar ?



☐ **A**



☐ **N**



☐ **V**

## Menhir Mentoul 5

Betek 1947 e oa ar peulvan-se brudet mat evit e vertuzioù yac'haouriezh.

Tud a zeue da skrabañ o c'hof :

- evit kaout blev hiroc'h ☐ **E**
- evit kaout mibien ☐ **R**
- evit pellaat an diaoul ☐ **V**



## Straed ar Skolioù 6

Petra eo anv ar maen-se, lec'hiet e-harz korn an ti a zo e penn kentañ « straed ar Skolioù » ?

- Maen-toull ☐ **M**
- Maen-brizh ☐ **A**
- Maen-hir ☐ **N**



## Skol publik bourc'h Molan

E 1931, eo bet degemeret skol publik kentañ derez Molan er savadur-mañ, war vord straed Kemperle. Er mare-se, e oa ur skol evit ar baotred hag unan all evit ar merc'hed.

Peseurt anv he deus ar skol hiziv ?

- skol Jakez Riou, skrivagner ☐ **M**
- skol ar vourc'h ☐ **O**
- skol Eric Tabarly, merdead ☐ **R**



## Distro d'ar blasenn Lindenfelds 7

Pegen plijus eo chom da ziskuizhañ ha da flapiñ dindan skeud ar wezenn meurdezus-mañ

Peseurt gwezenn eo ?

- ur wezenn derv ☐ **R**
- ur wezenn sapr ☐ **E**
- ur wezenn gistin ☐ **D**



## ECHU EO HO LABOUR, GOURC'HEMENNOÙ !

Laouen omp o lezel ac'hanoc'h da zizoleiñ ger-stur Molan :

dav eo deoc'h skrivañ, en urzh, pep lizherenn kavet a-hed ar pajennoù.

☐ ☐ ☐ ☐    ☐ ☐    ☐ ☐ ☐ ☐ ☐

☐ ☐    ☐ ☐ ☐ ☐    ☐ ☐    ☐ ☐ ☐

Gouzout a rit ?

Ar sturienn-mañ oa bet krouet gant Yves Clerc'h, da-heul ar skoed-ardamez.  
An daou oa bet asantet gant kuzul ar gumun d'an 19 a viz Mezheven 1982

Diwezhatoc'h, e 2008, oa bet krouet ul logo nevez, gant 3 bag-dre-lien a zegas  
soñj eus an 3 forzh-mor e Molan.

E 2023 oa kinniget gant an ti-kêr cheñch al logo, gant ur choazh roet d'an holl  
annezidi ar gumun hag a zo logo a-vremañ ar gumun



degemer@pregomp-molan.bzh  
<http://pregomp.e-monsite.com/>

Mersi bras da skoazellañ ac'hanomp :



moëlan  
sur-mer  
— MOLAN



Bro  
Kemperle